

P.-J. Helias :
ar wezenn
boutaoua



Diaouled
er menez



H. Gaudart :
Sant-Alar

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 17 — EOST - GWENGOLO 1978

Rener : Andreo Merser
Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 8 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 50 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 60 lur
- studierien, soudarded : 30 lur
- liseaned : hanter-briz, 25 lur
- broiou estrañjour : 60 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennoù-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennoù-post a zo da veza laket war ano P.-M. Mevel, C.C.P. 1499-55
Roazon.

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : Kenta trimiziad 1978.

C.P.P.A.P. : n° 34.627.

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulllet gant Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin,
le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an
aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emaint ket
da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet
anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

- Naig Rozmor, diwar Rabindranath Tagore : Kan ar vuhez	P. 3
- Per-Jakez Helias : Ar wezenn boutaoua	P. 5
- Huguette Gaudart : Sant Alar	P. 13
- Y. Miossec : Dreist ar mor braz - V	P. 21
- J.S. : Diaouled er menez	P. 28

Ha prenet ho-peus al leoriou-man ?

- P.-M. Mevel : **Kan ha stourm**. Soniou, gwerziou, barzonegou. Toniou gand F. Danno, P. Monjarret, hag all 20 lur.
- A. Merser : **200 rimadell** 10 lur.
- P.-J. Helias : **Mevel ar Goskêr** 10 lur.
- P.-J. Helias : **Penoaz e teuas eur Breizad da veza roue Bro-Zôz** 45 lur.
- P.-J. Helias : **Ar Mên du**. Embannadur kenta 25 lur.
- P.-J. Helias, Nest David : **Peziou-c'hoari** 10 lur.
- Jakez Riou : **An ti satanazed**, gand notennoù 12 lur.
- J. Le Dû, Y. Le Berre : **Roue ar Portugal**, eur gontadenn bed dastumed gand F.M. an Uhel 12 lur.
- Y. Miossec : **Eur veaj e Stadoù-Unanet an Amerik** 15 lur.
- Ernest ar Barzig : **Buhez ha Faltazi**. Adembannadur. Levrenn genta 10 lur.
- **Lapous-den Penn ar Bed**, renket hervez Synge gand C'hoariva Brezoneg Penñ-ar-Bed 10 lur.
- Naig Rozmor : **Karantez ha karantez** .. 18 lur.
- P. Le Roux : **Atlas linguistique de la Basse-Bretagne**. Advoulladenn an teir levrenn genta. Al levrenn 40 lur.
- F. Falc'hum : **Les origines de la langue bretonne**. I. Argumentation historique . 12 lur.

Evid ar vugale :

- **Ar bleiz, ar havr, hag ar zeiz gavrig** .. 5 lur.
- **Ar paotrig bara-mel** 5 lur.
- **Troiou-kamm an avel. Ar gaoter vihan. Ar marh-du bihan. Soubenn evid merenn.** Ar 4 leor 20 lur.
- **Kanaouennoù evid ar skolioù** 10 lur.

GOULENNIT AN OLL LEORIOU-MAN
DIGAND BRUD NEVEZ

6, ru Beaumarchais, 29200 BREST

Konta 10 % evid ar mizou-kas.

En tu all da 100 lur a brenadennoù : heb mizou-kas.

DANS AR VUHEZ *

Ar memez ster a vuez a rêd noz-deiz e va gwazied,
a rêd ive dre ar béd a-béd,
hag a zañs enni en eur skei ingal.

Ar memez buez eo a strink dre boultrenn an douar
al levenez e milieroù a vodou, a-raog tarza
e gwagennoù diroll a zeliou hag a vleuniou.

Ar memez buez c'hoaz a vez luskellet, euz an tre d'al lano,
er mor don, kavell ar hanedigez hag ar maro.

Skrija 'ran dindan e alan nerzuz
ha va halon a drid gand joa
rag stroñs ar vuez-veur o tondeuz penn an amzerioù
A dremen dreizañ d'an ampoent.

PEDENN

Gra ma ne bedin ket evid beza diwallet diouz an droug,
méd evid ma sellin outañ dispont.

Gra ma ne houlenin mui beza dizammet diouz va foaniou,
méd ar galon d'o gouzañv.

Gra ma ne gontin ket war ar re all d'am zikour,
méd war va nerz va unan.

Gra ma ne houlenin ket beza salvet gand aon,
méd gand fiziañs ha pasianted evid gounid va frankiz.

Gra ma talhin atao soñj euz va dle én da geñver,
Ha ma teu din koueza,
astenn da zorn d'am zevel én-dro.
Evel-se bezet greet.

* Adskrivet ha renket eo bet ar barzonegou-mañ gand Naig Rozmor diwar ar skrivagner indian Rabindranath Tagore.

PERAG ?

D'al laboused ez-peus desket kana,
hag al labous a gan d'az trugarekaad.

Greet ez-peus an avelioug skañv,
hag ar bagou a zañs laouen dindan o êzenn.

Din hepkèn n'ez-peus roet netra !

Lezet ez-peus ahanon noaz, e poultrann an douar nevez krouet,
gand va daouarn goullou,
din e karg da hounid va baradoz.

Hadet em-eus ha medet an eost dare,
ha pennaouet piz warlerh amzer ar medi :
deus bremañ pa gouez an noz war ribl ar huz-heol,
da gerhad va zeñzor.
O Mestr ar grañchou alaoueret !

DA EUR VAMM

Mamm, evidout e rin eur holier gand perlez va daelou.

Dija evid kinkla da zivreh ar stered o-deus kizellet kelhiou a houlou.
Med kolier va glahar ouz da houzoùg a skedo
evel eul luhedenn a geuz da va mañkou én da geñver.

NAIG ROZMOR
diwar RABINDRANATH TAGORE
Rozko, 1972-1973.

Ar wezenn boutaoua

Selaouit hag e klevot eur marvaill e-giz ma ne gaser
nemed seiz all dre ar peurrest euz ar bed-mañ. An eizved eo
hemañ ha tad d'ar re all ma n'ouzou ket outo. Bez em-bije
bet tu, koulskoude, da zeski anezo ma vijen bet grêt mod-all.
Med da betra selvij maga keuz !

Ar marvaill nemetañ-mañ, evelato, arabad deoh mond da
gonta anezañ d'eun bennag, ha pa vefe henneg gevell deoh
penn-kil-ha-troad, ne vefeh ket kredet gantañ. Dalhit anezañ
er wrez en ho penn hag e viro da vond e-barz ouz an oll
loened-krign bian n'o-deus netra d'ober aze nemed marteze
unan outo : an hini a labour ahanoh dalhmad d'ho lakaad da
gerzoud pelloh eged e leh m'emoh. Setu m'emom kuit.

Eun devez e oan o vond dre ar bed war ler ma zreid. Tra
hag a c'hoarvez a-wechou ganin pa zav ennon ar c'hoant da
zilezel ma zammig stalikerez evid senti ouz preñv ma fenn.
Hag an devez-se, o vale a-dreuz eul lanneg, ez on kejet gand
eur re voutou koad hag a gerze ivez. A gerze gand talabao
war an hent heb an disterra kristen enno. Neuze em-eus
goulennet hag-eñ e hellen mond e-barz, rag dond a ree ma
zreid d'ober droug din ablamour d'ar vein a oa kaletoh eged
ma ler. Ha mouez sioul ar votez dehou a respontas e oa
poent henn ober ma oan gouest. Hi hag he c'hoar a gasfe
ahanon keit ha ma hellfen gouzañv anezo. N'em-eus ket
gortozet pelloh evid saillad er re voutou gand an daou droad
war eun taol. Re vraz oant evidon, med marteze, e soñje
din, gand eun tammig plouz, diwezatoù... Neuze ar votez
kleiz a zirollas da c'hoarzin en eur lavared din :

— Dao vo deoh brasaad c'hoaz ma 'z oh gouest d'ober.
Ma n'oh ket, gwaz-a-ze evidoh.

C'hoarzin a ree e-giz eur zaill o tiskenn er puñs ha me 'n
em houlenne dindan ma hlopenn:

— Honnez, marteze a-walh, a zo faoutet.

Ha kerkent hi a respontas d'am fenn mud :

— N'on ket faoutet eun disterra, med n'on ket leuniet a-walh ganeoh.

Ar votez all ne ranne grik. Gwir eo, êsoh oa din enni. Ar baleer ma oant bet grêt evitañ a ranke kaoud e bao kleiz tevh eged egile. Med piou oa henez ?

Setu penaoz on-eus toullet hent on tri e-pad ar rest euz an deiz hag an dri-hard euz an noz. Ar boutou a gerze war-raog o-unan kaer. N'em-boa tra all d'ober nemed chom em zav enno. Ma faour-kêz treid, evid an dra-ze, a stagas da domma dizale ha da boaza din, an hini kleiz da genta, an hini dehou eun nebeud goude. Pell araog goulou-deiz, henez-all a wade dija deuz e veud, e zeul, e uvern. Mond a reem a-dreuz lanneier difin, ha pignad war venezier meineg, ha ne oa ket an disterra liou buez endro deom. Peseurt bro oa honnez ? Meur a wech e teuas din c'hoant da lammad er-mêz deuz ar boutou an diaoul-ze ha da youhal dezo kenavo. Chomet on enno, avad, ablamour ar votez dehou, da rei kalon din, a gonte evidon doare kenta boutaouer ar bed-mañ, padal an hini gleiz, kemend ha ma ouie, a glaske lakaad ahanon da vond diwar-dro. Ha setu pez 'm eus klevet.

Bez ez eus mil gwech pell-ze e veve e Breiz, war eun enezenn zouar e-kreiz ar yeuniou, eur pôtr yaouank a dremene toud e amzer o klask peadra da leunia e gov ha hini e vaouez koz a vamm. Stigna ree trapou d'al loened gouez ha batalmad an eoned ha yenna ar pesked er gwaziou gand e zaouarn nemeto. Rentet oa aliez d'ober gand an irin a gave er brouskoajou. Ne ouie netra all, med an dra-ze ouie. E vamm he-doa divennet outañ mond dreist ar yeuniou, o toud dezañ e oa enno toulladou aerouanted didruez. Moarvad he-doa aon ar vaouez da veza dilezet gantañ e-giz ma oa bet gand e dad, skarzet kuit eun devez bennag evid mond da weled pelloh ha ne oa ket echu gantañ c'hoaz e dro. Med eñ, eur pôtr kreñv-marh hag ampart-tre, ne bade ket gand ar c'hoant da gemer muzul an aerouanted. Ar vamm a varvas war ar fin goude aliet stard he mab da jom e leh ma oa. Hag eñ a bakas dioustu e wella baz, kaledet gantañ en tan, ha setu m'emañ o furchal ar yeuniou euz an eil korn d'egile. Siwaz ! Ne oa ket an disterra aerouant dre aze. War an tu all, avad, e rene eur hoad stank. Staga reas ar pôtr da dreuzi henez etrezeg ar zav-heol. Goude baleet e-pad daou zezev, e kejas gand eur hoziad e varo hir o touga war e chouge eur pez duillad keuneud. Ken pounner oa ar beh ma kinnige ar hoziad koueza d'an douar da beb kammed a ree.

— Leuskit ahanon da rei sikour deoh, eme ar pôtr yaouank.

Tapa reas an duillad gand eun dorn ken brao ha m'e-nije grêt evid eun neiz moualh ha lakaad anezañ kempouez war e dog. Mond a reas evelse da-heul ar hoziad beteg eun divalo a lochenn ha ne oa ket pell. Goude-ze e fellas dezañ kenderhel gand e hent.

— Da beleh emoh o vond, eme egile. Pres a zo warnoh, anad eo.

— Pres zo warnin d'ober anaoudegez gand ar bed, eme ar pôtr. Re bell on chomet da dena ma mamm ha n'ouzon kazimant tra ebed. N'ouzon ket kennebeud da beleh ez an, med bale rin keit ha ma hellin ober heb dalea e peb leh ouspenn hag eun nozvez hag eun devez.

— Ha gouest oh da veza den d'ho ker, eme ar hoziad.

— Hag ez on.

Egile a dennas eur skoultrenn deuz e zuill d'ober ganti eur vaz.

— Kemerit homañ, emezañ. Sikouret ho-peus ahanon, me raio sikour deoh. Ar vaz-mañ a gaso ahanon ganti war an hent ken pell ha ma plijo ganeoh mond. Med diwallit mad da zalea tu-bennag muioh ha m'ho-peus lavaret. Bep tro pa jomot d'ehana, sankit ar vaz en douar. Ma c'hoarvez ganeoh gortoz ouspenn hag eun nozvez hag eun devez araog loha kuit, ar vaz a stago da vroñsa, ha pa vefe e-kreiz ar goanv, hag a gollo eul lodenn euz he vertuz. Ma taleit dreist ar seiz devez, ar vaz a raio deliou ha n'ho-po ket kalz a zelvij diganti ken. Med a-benn eur miz leun, m'emoh c'hoaz er memez leh, ar vaz he-do maget gwriziou ken don ma ne viot ket gouest da zisplanta anezi en desped d'an oll nerz a zo ennoh. Deuet vo da veza eur wezenn e-giz ar re all hag aze e vo echu ho taol-chañs. Na 'z eot ket pelloh.

— Leuskit da gas, eme ar pôtr, ar heuneud-tan-ze n'e-no ket amzer da hlaza birviken mui.

Paka reas krog er vaz. Kerkent ha lohet kuit, ne jome liou ebed war e lersh euz lochenn na koziad.

— Gwelom beteg peleh e yelo, eme ar votez kleiz.

Hag e ree goap en-araog.

Yann — dizoñjet on bet da ziskleria e ano deoh, med

hoh-unan ho-peus kavet anezañ — Yann, eta, a heulias e vaz e-pad eur penn-devez ha ne zante skuizder ebed nag en e zivesker nag en e gorv. Evid e dreid, kaer o-doa bale war vein lemm, ar re-mañ oa kinvi evito. Er-mêz euz ar hoad en em ziskouezas eur gêriadenn. Yann, ha n'e-noa gwelet biskoaz kemend a draou hag a dud war eun dro, a hoanteas tremen an noz enni. Peseurt digemer a hortoze anezañ, ar hantreer heb kar na par er vro ? Souezet oe pa bedas ar merhed anezañ da zebri ar zoubenn, ar wazed da gousked er harr-di a blijfe dezañ ar gwella. Daou dra hag a reas goude sanket e vaz en douar.

— Ya, e skrignas neuze ar votez kleiz, dao eo gouzoud e oa tremenet ar hiziad araozañ dre aze.

Antronoz e oa gouel er vro. Ar wazed a c'hoarie boull war ar blasenn. Yann a yeas ivez, a zellas outi piz ha goude-ze a gemeras perz er c'hoari. Ken ampart oa ar pôtr gouez ma honezas bep taol. Lakêt oe ar hevezour da zebri boued dianvez, da lonka evachou a vouzaras dezañ e dammig penn. Pa hanter-zigoras eul lagad, an deiz warlerh, en e garr-di, e welas dirazañ eur mell greskenn war-bouez teurel broñsou. Lammad reas war e dreid ha displanta ar vaz ha skarza al leur 'nez lavared kenavo. Ar vaz, avad, ne denne ket warnañ ken stard.

— Ya, e hoapaas adarre ar votez kleiz, med e peleh oa ar hiziad war ho meno ? Araog pe a-dreñv ?

Yann a drohe hent, oh en em ziwall striz da jom el lehiou tudet. Stigna reas e drapou hag e grouglasou bigrier evid paka e voued. Adkavoud ree ar vaz he nerz, ne oe ket mui ar broñsou da weled. Yann a ree anaoudegez gand ar bed endro dezañ, n'e-n'oa ket a-walh gand e gorv penn-da-benn evid ober e vad euz ar bevez. Abarz pell e ouezin muioh a draou eged ar Boudedeo, a lavare ar pôtr d'e dog. Dizoñjet gantañ e fallaenn genta p'en em gavas da dremen dirag eur park ma oa bodet ennañ eur halz a gouerien o teurel youhadennou diehan. Yann a zankas e vaz en eur hleuz, dindan eur bouchad haleg. Eur wech tostêt e welas, e kalon an engroez, trouhadou pôtred en o brageier berr ha rochedou kanab, dalhet o bleo hir gand eul liamm kolo, hag a ree beh d'en em houren daou-ha-daou. A-bouez bounta ha sacha, Yann en em gavas war ar renk kenta dres d'ar mare ma oa eur hevezour oh ober tro al lias, ar maout gantañ war e ziskoaz, evid teurel an diweza heg.

— Harzit 'ta, eme Yann, me zo den deoh.

Egile a lezas ar maout da goueza evid skoulma e roched.

Setu m'emaint o daou war al leurenn. O, ne oe ket êz ar c'hoari. Meur e wech e oe tost da Yann kaoud al lamm. War an diwez, koulskoude, eñ 'ni a sitakas e genstriver d'an douar penn-da-benn gand e gein. Pebez treh ! Sammet oe kuit gand an engroez, kaset euz an eil tu d'egile, lidet e peb ti, badaouet a veuleudi ken e asantas da hegal ar brasa kevezour euz ar vro-oll eun devez bennag war-lerh. Ha dond a reas adarre ar maout gantañ.

— Ya, e trohas eur wech c'hoaz ar votez kleiz, med dao eo gouzoud e oa tremenet ar hiziad araozañ dre aze.

Goude roet d'an trehet ar bokadenn a beoh, Yann e teuas soñj dezañ euz e vaz, sanket er hleuz dindan eur bouchad haleg. Mond a reas di d'an daoulamm ruz. Ar vaz a oa goloet dija a zeliou. Tremenet oa warnañ eur zizun vad. Yann, leun a vez, a stagas adarre gand e hent, nemed e ranke bremañ labourad stard gand e zivesker hag e gorv. A-boan ma oa divehiet e vreh gand ar vaz.

— Ne yelo ket pell ar pôtr, a chourikas ar votez kleiz.

Goude bet paket diou wech berr, Yann 'n em ziwallas da dostaad, an deveziou warlerh, euz ar parkeier hag an tiez. Gouzoud a ree bremañ daou dra ne oant ket bet desket dezañ gand e vamm. Kenta tra, plijuz-tre eo en em gavoud gand tud all, ken eo diêz deoh en em denna diouto. D'an eil, plijusoh c'hoaz gounid an treh er c'hoariou, pez a denn warnoh meuleudi a-leiz. Med soñj e-noa ivez beza touet d'ar hiziad ne lezfe ket ar vaz da hlaza endro. Koustfe pe goustfe, felloud ree dezañ beza den d'e her.

Ha padal e fazias. Eur vintinvez ma oa kroget adarre da vale war lezenn eur hoad evid kaoud e vad euz an heol, e klevas eur sonerez skiltr o tond dezañ euz eur vourhadennig en draonienn. Ne hellas ket padoud. Sanka reas e vaz en douar ha diskenn etrezeg an tiez. War ar blasenn, daou zoner a gase d'an iliz heuliad tud eun eured. An dud-ze o-doa gwisket brava dillad bet gwelet gand Yann biskoaz. Bez e oa ganto zoken en o zreid bouteier ler. Yann e-noe mez gand e dreid noaz. Med ne hellas ket chom heb mond war-raog beteg ar porched digor. Ha da houde en em gavas dindan kerdenn ar hleier gand tolpad ar glaskerien-vara hag ar re-vahagnet. Eun eured a-stroñs 'ni oa honnez. Echu an overenn e oe abadennoù dañsal war ar blasenn ha dre strêjou ar vourh. Laouen an oll. Da houde, en em lakeas an dud ouz taol en eur pezh karr-di ha war al leur dirag. Pedet oe Yann gand an dud nevez da garga e gov en eur horn bennag gand ar beorien. Biskoaz n'e-noa tañvêt seurd danveziou

boued. Ha setu ar horoll o kas adarre gwell-pe-well. Eur mare oe ma teuas tud ar friko, an dud nevez da genta, da glask ar beorien evid eur gavotenn. Ar hiz-se oa ganto. Yann oe pedet gand eur plah yaouank hegar-tre ma kavas dezañ e oa outi kaerra tra grouet er bed-mañ. Santoud a reas beza badaouetoh c'hoaz eged d'an devez m'e-noa evet traou kreñv gand ar c'hoarierien boull.

— Ya, e strinkas c'hoaz ar votez kleiz, med dao eo gouzoud e oa tremenet ar hoziad araozañ dre aze.

Ar pôtr ne ouie tripal na gavotenn na brall. Med ne oe ket seizdaletoh o teski. E-pad ma oant ganti, ar plah a lavaras dezañ :

— Souezet on pa welan eur pôtr yaouank ken gouest ha c'hwi e-touez ar beorien hag al laerien-boued.

— Me n'on ket euz ar re-ze, emezañ. O tremen dre amañ oan hag on chomet.

— Ma zad, emezi, hag a labour ar stal-mañ, e-nefe ezomm euz eur mevel ha ne vefe ket dieg an tamm outañ.

— Hennez a vo me, eme Yann, mar plij ganeoh.

Ne zoñje ken e tra all ebed nemed chom e leh ma veve ar plah yaouank dispar-ze. Margaridig oa heh ano, pennherez Penanger.

Setu Yann deut da vevel er plas, eur wech echu an tri devez friko. Ober a ree e zeiz gwella evid plijoud d'an oll. Kreñv hag ampart evel ma oa, e teskas buan ar vicher. Beb abardaez-noz e kerze da gousked er marchosi en eur zistaga evitañ e-unan ano Margaridig Penanger. Beteg an abardaez ma teuas dezañ, e-leh an ano-ze, eur rastellad geriou savet euz don e benn : ar heuneud-tan-ze n'e-no ket amzer da hlaza birviken mui.

— Yennet adarre, e youhas ar votez kleiz.

Ar pôtr Yann a zaillas en e vragez, a zaoulmmas etregeg lezenn ar hoad e leh m'e-noa sanket e vaz. Aze dres e save bremañ eur wezenn teir gwech uheloh eged Yann. Keina reas outi. Gand oll nerz e ziskoaz e klaskas diwrizienna anezi. Poan gollet. Neuze e klevas eur vouez en e gichenn o tistaga sioul-tre ha melkoniz war eun dro :

— Ne 'z eot ket pelloh.

Ar hoziad a oa en e zav war dreuzou eul lochenn ha ne oa ket outi araoz. Ar memez lochenn hag ar wech kenta.

— Roit din eur vaz all, e klemmas Yann strafuillet, hag e welot penaoz, hiviziken...

— Re ziwezad, eme egile. Amañ eo echu ho taol-chañs. Ne oa nemed ar vaz-se ganin. Bremañ, selaouit ahanon. Ar wezenn-ze a zo eur wezenn fao. Warhoaz, ni a daolo anezi d'an trañ ha me a zesko deoh tenna bouteier deuz he hoad. Seiz re voutou, nag unan muioh. Pep hini outo a gerzo war e du da glask eur pôtr yaouank grêt e zofj gantañ da foeta bro evid mad, heb chom a-zav evid eur c'hoari-boull, eur henstrivadeg gouren pe eur plah yaouank gand eun ano a gan. Marteze e rankint bale goullou e-pad pell amzer araog kavoud treid diouz o muzulioh, treid gwir kanteidi a vo kaset ganto e leh m'o-do c'hoant da vond. Evidoh, ma fôtr, c'hwi ho-peus faziet teir gwech, n'em-eus ket galloud da zasprena ahanoh. Arabad deoh kaoud keuz, ho kalon a zo gweloh eged ho penn. Ar seiz re voutou a zeuio diwar ho taouarn hag ar wezenn-ze a zistroio eun devez marteze gand ar seiz baleer o-do kavet an tu d'en em ziwall ouz peb laoskentez. Hag ar seiz a gonto deoh ar bed ken brao ha ma hellfen-me ober m'em-bije an aotre. Deoh da hortoz anezo en eur denna deuz ar gwez fao boutin bouteier pemdez evid an dud ne garont ket mond pelloh eged kan o hillog. Hag e hellot sevel, en ho penn, kemend a varvaillo ha ma plij deoh.

Setu penaoz e teuas Yann da veza boutaouer, kenta boutaouer ar bed, emezer, rag araozañ an dud n'o-doa ket anaoudegez euz bouteier koad. Ne reent nemed gand ler al loened evid diwall ler o zreid. N'ouzer ket hag-efñ e timezas Yann gand Margaridig, pennherez Penanger. Eun dra asur eo ne welas morse o tistrei dezañ hini ebed euz ar seiz re voutou. Hag e varvas heb kaoud mez gand e c'hwitadenn peogwir ar hoziad, moarvad, n'e-noa kavet den ebed gweloh egetañ.

— Ar hoziad-se a oa tad Yann, a yudas ar votez kleiz. Hennez e-noa kavet an tu da zenti hepken ouz e benn. E vab, siwaz, ne oa ket ken penneg hag efñ.

Dres pa oa ar votez dehou, an hini ma oan an esa ganti, o kas he marvail da benn, me ne oan ket evid padoud pelloh. Ne zanten ket ma zreid ken, dreistoll an troad kleiz, ha poan em-boa em horv. Gouzoud a reen bremañ e oan et en unan euz ar seiz re voutou a glaske diehan, a-dreuz ar bed, ar seiz klasker-chañs direbech. Gouzoud a reen ne oan ket unan euz ar seiz. Ne lavarin ket deoh perag, med henn gouzoud ran

ivez. Karet em-bije gouzoud c'hoaz hag-efñ ar c'hweh re voutou all o-doa kavet an treid dres diouto. Padal 'm-eus 'n em lezet da goueza war ribl an hent e-pad ma kendalhe an diou votéz da vond pelloh. Hag em-eus klevet an hini gleiz o lavared d'an hini zehou :

— Hennez e oa re vian e droad.

Hag an hini zehou a respontas.

— Eun disterra, eun disterra, eun disterra...

Ne ouezin tra all ebed, na c'hwi kennebeud.

Per-Jakez HELIAS

EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ

Evid studi pe kelenn ar yez :

* KOMZOM, LENNOM HA SKRIVOM BREZONEG, gand J. Tricouze

Diou levrenn : Kenta lodenn - Eil lodenn	pephini :	25 F
Diou bladenn da heul al lodenn genta (KLT)	24 ha	28,50 F
Eur gasetennig e brezoneg Leon, da heul an eil levrenn		40 F
Evid Bro-Wened : eur gasetennig evid al lodenn genta		30 F

* AR BREZONEG DRE RADIO, LE BRETON PAR LES ONDES, gand V. Séité

Daou levr :		
Kenta levr, (evid ar re a zo o kregi gand ar studi)		17,50 F
Eil levr (eil bloavezh)		19,50 F
Eur gasetennig da heul peb levr	pephini :	30 F

* Al levrioù-se eo a vez implijet gand ar Hentelloù dre lizer-mañ :

- Levrioù J. Tricouze : Kentelioù dre lizer Skol ar Merher, A. Merser, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest

- Levrioù V. Séité : Skol dre lizer, V. Séité, Ti-Carré, 29150 Kastellin

Da veza goulennet en oil stalioù-levrioù pe digand :
EMGLEO BREIZ, B.P. 17, - 29266 Brest Cedex
C.C.P. EMGLEO BREIZ, 1649-07 U Rennes

SANT-ALAR (*)

Eur mintin, goude vakansou-Pask, e oen kaset gand va mamm da skolig St-Alar. Komz a reas eur pennadig d'an Dimezell e-kreiz ar porz, ha neuze, va lezas va-unanig e-touez eur vandennad skolidi direiz, a haloupe en eur grial spontuz.

Taol-c'hwitell ar rener a lakas ar vugale da jom a-zav, ha raktal d'en em voda dindan ar bratell dirag dorioù o hlasou e-leh ma hortoze ar vistri hag ar mestrezed. Goude beza tennet o botou-koad en em renkas ar vugale, daou ha daou, ar plahed en tu-dehou, ar baotred en tu-kleiz. Ha me ? Ne anavezan plah e-bed. Arsa ! ar genta, ha va unan-penn dirag fri ar vestrez e-pad ma hoarze ar re all 'n eur en em vounta.

« Nann, nann, ma merhig. A-dreñv ! Kit a-dreñv peogwir emañ hoh-unan. »

An dra-ze a zeblante eur vez evidon, hag hep prederia en em daolis e renkad ar baotred hag e tapis krog e dorn Matao, va amezeg. C'hoarzedeg ha cholori, tudou ! Ne vez ket mad d'eur plah, lakeda, pega e dorn eur paotr e-barz ar skol ! hag ar wech-se (ar wech-se nemedken, rag daoust d'am spered fall a-walh am-boe kalz a gamaradezed) eh antreis er hlas an diveza, gand va fenn stouet, en eur ober va beg-kamm, hag en eur ruza va chaoc'hennou war ar planchod.

Lakaet e oen war ar bank kenta e-kichen eur paotrig bleo melen - Pol e ano - hag a zelle ouzin dre zindan ha ne baoueze ket da dosi va ilin evel hep soñjal. « Dao vo deoh chom fur er skol » a oa lavaret din. Ya ! med piou a gar beza heskinet ? ha pa welis eur flistradenn a liou o koueza hag o saotra va linennou a « vizier » war va haier nevez-flamm, e laoskis eur zoroh a imor, e pegis e bleo flour va

(*) Trugarekaad a reom ive H. Gaudart da veza roet deom an danevell - mañ d'embann. Gand an danevell-mañ eo he-deus bet hi eil priz Per Trepos e 1977. Or gourhemennou dez.

enebour hag e taolis dezañ eur pezh skouarnad hag a stlakas er hias didrouz. Ar vestrez, kounnaret, on tennas er-mêz ar bank hag or bountas a-dreñv an daolenn e-leh, e kuz, ma klaskem rei taoliou treid an eil d'egile. Bep an amzer en em groaze on daoulagad fuloret.

Pol a oa eur paotrig koant, bleo melen dezañ, eur mistik-grill (1), nompas foñgn (2), med eur c'hwit (3) a glaske atao eun dro fall d'ober. Biskoaz ne hallem boud mignoned. Ne vim ket enebourien kennebeud med chom e reem an eil e-keñver egile, evel daou gi prest da harzal.

Ha setu penaoz, plahig a bemp ploaz, e ris anaoudegez gand buhez ar skol. Komañs a reas fall, med e gwirionez, e-pad an tri bloaz ma chomis e skoliñ St-Alar e labouren mad hag e vezen ur a-walh zoken, beteg an abardaer-se... med sed a zo eun istor all a vo kontet deoh m'ho-peus ar basianted d'am lenn...

Bep mintin e kuitaen va zi gand Matao hag e hoar henañ; e Kleuz-beuz e tigoueze ganeom diou blah hag e Run-treud diou all; neuze e tiskennem eur wenojenn striz meinek a-hed ar gwarimeier e-leh ma pouzle raden uheloh egedom. Eur rummad all hag a zeue euz Koad-Loued, pell, du-ze war harzou parrez Gwiskri a errue ganeom goude beza heuliet ar stankenn. Eur wech treuzet ar ster war eur pontig koad hag a vrasigelle dindan or botoz e lezem on parrez-ni evid beza e parrez Bafleg. Pignad Run-Roh ne oa ket eun afer aez, ha meur a wech e veze on daoulinou kignet gand ar mein lemm pe an drêz toupog... Erruet war gompezen Roh, echu ar boan. A-hed an hent braz e hallem neuze strani ha ruza gand rummad re Koad-Paou ha Kerchuz o-doa adkavet ahanom; daoust d'an hent beza hir, ne zigouezem ket aliez diwezad er skol.

A-dal ma teu em spered soñj euz skol St-Alar ma 'h adwelan he mogerioù mein loued hag he fenestrou uhel, ar wezenn-fiez war vord an hent - pe vlaz a halle eta kaoud he frouez a goueze araog boud aho hag a vreigne er boul-trenn ? - Na koant e veze mellou pennou glaz ar bokidi-hortefisia a boulze e traoñ ar porz ouz moger ar bratell ! Hag ar wezenn - avank a oem o hortoz, fromet, ar bleuñvadeg, pegement e karem he bleunioù gwenn ! A-wechou e seblante deom e veze re striz ar porz, hag e haloupem e aliezioù liorz ar vistri, etre bevannoù turkantin ha bokidi-armaeria.

E penn ar skol, oh ober sin deom, edo ar maezioù sioul...

E keriadenn St-Alar e konter eun ugent ti bennag savet a-hed an hent, hag en o zouez e weler eur vouloñjêrêz, eur

gigêrêz, diou ostaleri, hag eur verzêrêz-ispisiri e-leh ma werze (pe roe kentoh !) Tante Fin' madigou d'eun toullad bugale arloup (4). A-dreñv, eun tammig pelloh, eur hovel... Aze en em vode atao, eur vandennad paotred kuriuz hag a zelle piz ouz ar « marchal » o kelhia rod eur harr pe o sanko eur pezh houarn e troad eur jao. Chom a reent fur, gand o daoulagad dispourbellet, heb ober van zoken ouz ar hwez pud ha flaeziuz en em lede tro-war-dro ar hovel. War blasenn, ar piñs, ar halvar, hag ar japelig koant hag a zigore evid devez ar pardon nemedken.

Goude merenn... arsa 'ta ! dao eo din koulskoude komz euz ar pred treud hag heuguz a-wechou, a veze servichet deom ! Soñjal em efvorennoù skol a daol eur sklerijenn a levez em ene; med ma teu em spered soñj euz ar hantina, ne hallan ket en em viroud da skrijal. Eüruz pa veze eur bannah soubenn legumach, on aferioù a yee fall-tre pa veze aozet deom makaronioù kaotennet, pe ragoud suillet, med an dra a lakae ahanom da heugi e oa ar bara-melen greet gand maiz (prof ampoezonet an Amerikaned !). Eüruzamant e veze a-wechou an daou-damm bara gwiniz amannet ha goloet a boultur chikola, roet d'ar mintin gand va mamm evid merenn-vihan, a dorre eun tammig va naon.

Goude merenn eta, or bouelloù hanter-houlo, ez eem da haloupad ha da furchal er parkeier tro-war-dro... ha pa zigoueze an devezioù kaer e kreske en or hreiz ar c'hoant da glask lus e stankenn Meil-Veinek. O sur ! e ouiem ne gavfem lusenn e-bed e miz even e goudor ar hoajeier-fao, ha neuze 'ta ! ar bourmadenn a veze ken dudiu dindan an heol klouar ! Red 'oa koulskoude ober an droiad buan, hep stlejal, evid erruoud en-dro d'ar skol da ziw eur. Mezet gand c'hweziou fromuz an nevez-amzer e veze diêz staga va evez ouz ar hentelioù, hag aliez e huñvreen, va daoulagad troet daved ar prenestr damguzet gand ar wezenn-fiez he delioù druz a skrije goustadig en avel.

Echu an devez skol eh adkavem ar frankiz. Erfin e hallem ruza, kemeroud hentchoù all, huñvreal, klask neizou, arvesti ouz ar ster... hag en em ganna.

En amzer-se, me ' gred a-walh oll devezioù va buhez a oa sklerijennet gand heol an hafv ! O sur ! em-eus krenet aliez gand an anaoued em diljad gleb. Sur em-eus gouelet meur a wech gand an droug a bege em daouarn hag em zreid c'hwezet gand an droug-goañv. E gwirionez, em-eus dalhet soñj euz daou zevez fall nemedken. Eur wech, kement a erh a holoe an douar ma teuas va zad d'am herhad, hag e hallis, kludet war e ziskoaz, bama ouz ar gwender didrouz-se a cheñche krenn ar maezioù. Eur wechad all, ar ster c'hwezet gand ar glaoeier spontuz, a zirollas er-mêz euz he naoz hag a

veuzas he briellou, pontig stankenn Run-Treut hag ar prajerier. Evid peñz a zell ouzin ez is da glask va zammig kreun ha da gousked e ti eur geniterv d'am zad e Koad-Paou... Ha va noz a oe karget gand gwall-huñvreou.

War ar bord-mañ euz ar ster, war on tachennad neketa ! e veze reñket ar hontchou etre enebourien an ampoent. Ar ster a riskle hag a strinke etre ar mein lufret; deliou ar pupli hag an haleg a grene dindan c'hwez flour an avel; war liou glaz tener ar radeneg e luhe deil tefval ar helenn. Hag e kredem luzia kement a beoh hag a hened gand on taboutou, or harnachou hag or hunujennou ! Aze em-eus desket (sevennoh eged er skol) eun nebeud-brao a boziou louz, ha « beg-skwell, fri-boned, barrikenn ha reor-toull » n'int nemed koantiri evid skouarniou c'hwek ar babigou !

D'ar mare-ze n'am-oa aon nemed diouz gwazi ha deñved Run-Treut, Yann-Boned-Ruz an arhouell a jome en or puñs, ha... re vraz va bandennad. Matao ha me ni a oa ar re yaouanka. Gantañ - va breur hogozig - e rannen an oill deñzoriou karet gand ar vugale; ar hanetennou-pri, ar viou hag ar neizou, ar boulou-dero, bili luf ar ster... Pa ' zave bedou (5) Matao ha me, a glasse skarza on botou ha mond pellikoh da zelled ouz ar sach-bleo pe ar pegad, hep riskl da dapoud eun taol chifuz. Med eun deiz, ne zoñjem mui c'hoarzin pa weljom Jakez, unan braz, o pila Jorj war an dachenn, o tapoud e votez hag o stlepel anezi er ster. An oill a jome skoet e-pad ma ree goap al lampon : « Galoupit 'ta ! ha founis (buan) ! c'hwí ' gavo ha potez 'ba' Meil-Né ! »

Sur e tee beza uhel a-walh ar ster, paneved-se e-nefe troñset hemañ e vragou, honnez he broz, evid klask kregi er votez, med homañ a yee gand he hent e-kreiz an dour evel eur vagig, hag e-keid-se he mestr, kamm-jilgamm, pennfollet, a rede a-hed ar vriell en eur vlejal hag en eur ouela. An enebourien diaraog, unvanet gand an dro gamm-se, a hope war ar paotr fallakr... euz a-bell. Piou e-nefe c'hoarzet ? ar baourentez a veze on lod deom-ni hag or halonou a'oa gwasket en eur zoñjal er roustenn a bakfe Jorj er gêr.

Hag ez ee en-dro e-giz-se buhez ar skol, boutin ha dispar a-gevred.

Evid redeg ha c'hoari er parkeier etre kreisteiz ha diw eur, em-beze atao ar memez kamaradezed, ar memez kompagnunez a ragacherezed hag a fringerezed... Ivana, Anne-Mari, Bernadette, Nola... Homañ peogwir e chome e Sant-Alar, a anaveze mad-tre ar hornadou gwella evid c'hoari hep beza

direñket gand ar re vraz. A-wechou e tigase ahanom en he zi (he mamm a oa devezourez ha ne zistroe ket d'ar gêr d'he merenn) ha meur a wech on-eus poazet eun nebeud a avalou-douar hag a zioulae on naon du. Mez em-eus o lavared ne oa ket doujet Nola muioh evid-se rag e oa lent ha poud (6) eun tammig ar paourkâz Plah. Deuz seurt tud e vez greet goap daoust d' o ferziou dibar, siwaz ! E gwirionez e karem Nola, med kement-se ne harze ket ouzom da heskina anezi.

Daoust hag e vez greet skol-louarn d'ar goañv ? Ne vez ket ! Med d'an hafiv, pa strink an heol e vannou klouar war ho tivreh hag ho tivesker noaz, pa glevit al laboused pennfollet o kana hag o tiskana er brouskoajeier, pa zigas an avel war e askell c'hweziou fronduz an deliou nevez, pa darz a-viliadou ar bleuñv er balanegi, lavarit din, hag anavezoud a rit eun nebeud tud a jomfe reiz hag a zerrfe o daoulagad, o diskouarn pe o halon ?

Hag eun deiz, e balaneg Tin Vahe, mezevellet gand or hoariou on-eus ankouët e oa dao deom destrei d'ar skol. Mod n'or-befe ket ankouët ? Kutuiljet on-oa deliou tener ar histin ha korzenno geot seh, hag evel arzourien on-oa greet gwiskamanchou dispar. Staga a reem an deliennou an eil ouz eben evid ober koefou, jiletennou, ha broziou. Ha goude, gwisket gand an dillad-bresk-se, e valeem e-touez ar bodou-banal.

Arsa 'ta ped eur e halfé boud ? A-greiz-oll en em gavem diaezet, trubuillet, ha taolet ganeom on dillad a fest, en em zidalpem da redeg war-zu ar skol.

« O merhed ! gwall ziwezad emaoch. Talv ket 'boan galoupad mui ! Peder eur 'zo sonet dija ! » a lavaras eur vaouez koz dirampet (7) war eur gador e-tal ti Tante Fin'.

Peder eur ! o mil malloz... Peseurt diaoul fall e-noa c'hwezet war on spered hag e-noa dalhet ahanom da huñvreal e-keid ha ma laboure or hamaraded er hlas tomm-bero ?

Bountet gand ar re all ez is ar genta er hlas didrouz. An oill skolidi a zistroas da zelled ouzom. Ar vestrez a daolas warnom eur zell souezet, ha fuloret, a stlakas he reolenn ouz he buro, e-pad ma save eur cholori spontuz a youhadeg hag a hoaradeg. Rag, ne oa ket paotred eo o-doa greet skol-louarn ! ne oa ket ar re ziweza eo o-doa didalvezet ! nann, med « chouchoued » ar vestrez, ne lavaran ket ! Ha ma ne skoas ket an dimezell ganeom, e oa peogwir ne skoe jamez, ha dre ma oa gloazet en he harantez.

« D'ho plas ! plahed divergont ! Ha na fichit ket (8) ! ha me ' zo ' vond dioustu da skriva eul lizer d'ho tud evid lavared dezo peseurt merhed dizent o-deus ! »

Na hir e oa an eur-se ! Daoust hag ho-peus dija tremenet eun eur heb ober netra, hep fiñval, ha gand kement a vez hag a anken en ho korv ?

Bep a lizer on-noa bet da gas d'ar gêr. Eun ael fall a hiboude em skouarn; « Lennit ar paper ha rogig anezañ ! » Biskoaz ne oa bet an hent ken berr ! Penaoz e hallfen derhel penn da gounnar va zud ?

Va halon a stoke em harloñchenn, va gwad a verve em gwazied. Va zad a dapas al lizer, va mamm a lennas a-uz d'e skoaz, hag e hortozis an arnev da darz ! - ha kement-se a zigouezas buan :

« Loen fall ! Komañset ho-peus dija d'ober troïou kamm ! Lakaet am-eus homañ er skol, hag an Intron-mañ a ya da vale he reor a-dreuz ar parkeier ! N'ho-peus ket mez ! Honnez ne ra ket four anezi gand ar boan a ra d'he zud ! Skol-louarn... d'hoh oad ! Eur plah seiz vloaz oh ober skol-louarn ! eur plah, lar 'ta ! hag e vez laret 'maoh eur plah fur ! M'ho-peus ket c'hoant labourad, kit da ziwall ar zaout ! ha n'am-befe ket fiziañs ennoh c'hoaz ! Skol-louarn, divergont ! »

— N'am-eus ket greet esperh (9) », emezon en eur val-bouzad.

Neuze d'am mamm :

« Ha c'hwi ho-peus greet skol-louarn, c'hwi ?

— Me ? Che, nann sur ! » a respontas va mamm en eur zistrei daved ar prenestr.

— Na me kennebeud », a zistagas va zad, krenn.

Arsa 'ta, setu eun dra souezuz : ar rebechou greet war an ton braz a goueze war va chou-gil (10) evel grizil e miz meur, med ne seblante ket fuloret, ha dreist-oll e kredis gweled e zaoulagad sklêr o c'hoarzin. Ha diskoaz va mamm hijet goustadig ? O nann, nann, ne oa ket posubl ! Gouela a ree-hi, sur, war va falloni.

Pa lakaas dirazon eur pladennad zoubenn, va mamm a lavaras :

« Pa vez galoupet dre an hentchou, e vez digor mad ar

hov. N'on ket souezet mui ho-poa naon ken aliez ! »

Antronoz vintin e kemeris al lizer euz daouarn va zad :

« Sinet ho-peus, Papa ? »

— Ya ma merh, hag am-eus goulet zoken digand an Dimezell, derhel ahanoh e pinijenn e-pad ar rekreasionou... »

Va ael fall a drutenas (11) ahanon c'hoaz da zistruja ar paper daonet... med merzerez vihan, e plegen va hein dindan va flanedenn hwero.

En em voda a rejom, va mignonezed ha me evid preg euz on abadenn. An oll oa bet chikanet, nikun n'oa bet freillet.

« Ha c'hwi Nola ? »

Mamm Nola, evel kustum, n'he-doa ket taolet pleg war pezh a gonte he merh, hag he-doa sinet heb lenn. O selaoui Nola e soñjem he-defe kavet gwelloc'h beza friket he diskouarn dezi, pe freillet gand eun torchad linad !

« Me, emezon, me ' gred e vin dalhet e pinijenn e-pad ar rekreasionou... beteg fin ma buhez... »

O ! petra, war an douar kriz-mañ, oa terruploh eged ar hastiz-se ?

Er hlas, ar vestrez a zellas buan ouz al liziri hag a lakaas anezo war vord he buro. Goulenn a reas digandin displega va barzoneg. « Mad-tre » a lavaras gand he mouez ken flour. On fenn stouet e poanjom goude war eur skrivadenn. A-wechou e strinke an dour em daoulagad. An amzer a dremene ha va anken a greske.

Pa 'z eas er-mêz ar skolidi, e chomis war va bank, troet va zell gand dizesper daved ar vestrez he-doa kroget da reizha on deveriou. Soñjal a reen e oa skrignaden he fluenn goloet gand lammou foll va halon; ken stardet e oa va harloñchenn ma kreden e oan o vond da goueza en alez, mouget. Hi ' zavas he fenn, ha souezet, e paras he daoulagad warnon :

« 'Tra 'maoh ' ober aze ?

— Med Dimezell...me 'grede... Ma zad e-neus laret... me 'grede din e oan dalhet e pinijenn.

— E pinijenn ? Perag ? O ! an diodez anezi ! »

Buan e tiskennas euz al leurenn hag e tennas ahanon

er-mêz ar bank.

« Sellit ouzin. N'oh ket bet skoet ? N'eo ket bet freillet nikun diouth, emichañs ? »

— O nann, den e-bed, Dimezell. »

Na koant e oa-hi gand he bleo berr rodelleg hag he daoulagad gell ken tener; he bizied hir ivinou ruz dezo a blije kalz din. Nag e karen anezi ! Nag a geuz am-boa da veza feuket anezi ! Nag e vefen fur hiviziken !

« Ale ! Kit da hoari bremañ ! »

En eul lamm e oan er porz e-leh ma hortoze ma mignonezed en eur brederia, reñket ouz ar voger. Eur « youc'hou » skiltr, c'hoarzedeg, stlakadennou daouarn : « Un', daou, tri ! Piou ' vo ar bleiz ? C'hwi ! », ha diboaniet, e krogem en eun abadenn touch-touch.

Petra oh deuet da veza, skeudennou skañv va henta bugaleaj ? Serrri a ran va daoulagad hag e teuit dioustu em eñvor : Bernadette ar goantenn gand he bleo hir damrodellet; Anne-Mari eun dremm ront, pikou-panez dezi; Ivana labousig mistr ha lijer; ha Nola daoulagad sklêr ha dioujod ruz. Peleh emaoñ va hamaradezed ? Biskoaz n'am-eus klevet doare diouzoh... nemed euz Nola, ar paourkêz Nola a vreign he askorn du-ze e bered Bañleg, maro gand eun taol-meniñ-jit d'he naonteg vloaz, en he zi, he unanig penn, egistao.

Ha souden e welañ, e-touez ar raden, o tiskenn ar roz, eur plahig dezi natennou plezet e kurunenn fichet gand eur zeizenn. Redeg a ra, hag he felerinenn zu a foet he daoulin. War ar pontig plank e harp, ha stouet war an asplad bezo, he sell bamet, ouz ar felu glaz o koroll e red an dour. Selled a ra hep fin, ha mezevellet, e sant ar pont en em zistaga euz ar riblou hag ouz he has buannoh-buanna a-uz d'ar ster difiñv, du-ze, etrezeg ar mor braz...

Huguette Gaudart.

(1) Mistik-grill = e galleg, maigrichon.

(2) foñgn = droug.

(3) c'hwit = lampon

(4) arloup = marlonk.

(5) bedou : tabutou.

(6) Poud = droch.

(7) rampet.

(8) fichit : fiñvit.

(9) esperh. = a-ratoz.

(10) choug-gil = choug-ar-hil.

(11) trutenas = trutellas.

DREIST AR MOR BRAZ

V

D'an abardaez, er memez devez, ez eom, va mignoned ha me, da gemered eur banne d'an otel Hilton. N'eo ket abalamour ma'z eo an otel brasa hag ar braoa e kêr, med abalamour ma 'mañ just war vord ar mor, war eun dorgenn, tre troet e brenestou braz war-zu ar huz-heol. Neuze ez eus dirazom eur gwel dispar.

Tomm eo c'hoaz. An amzer a zo kaer. An oabl n'eus ket ken eur goumoulenn warnañ ha war ar mor n'eus ket eur wagenn; a-veh ma teu dezañ kriza eun tammig beb an amzer.

Pell du-hont, a-zioh an dremmwel, an heol a zo izel dija. E gelh braz, melen-aour, a laka an oabl da gemer eul liou melen-ruz euz ar re gaerra. Ar mor dindannañ a lugern a-blasou evel aour teuz o vervi.

Med ar helh a ziskenn buan a-walh hag a gresk dre ma tiskenn, en eur ruzia ken na deu da veza ruz-gwad. Endro dezañ, an oabl hag ar mor a gemer kerkent ar memez liou mantruz.

Neuze, koulz lavared en eun taol-kont, ez a da veuzi war an dremmwel, rag er Martinik ar huz-heol hag ar serr-nnoz ne badont ket tost keit ha ma reont en on broiou amañ.

Kerkent ha ma'z eo kuzet an heol, an traou oll a cheñch o gwel. Dirazom an dremmwel a zo eet da goll. An oabl a chom c'hoaz eun tammig gwennoh eged ar mor, med tost emaint o-daou da en em veska en deñvalijenn. En tu kleiz, en tu all d'al lennvor, n'eus sklerijenn ebed ken war ar meneziou. An deñvalijenn o koueza warno, a ro dezo eul liou dispar. Kredi a ran n'eus gouest den ebed da rei da entent mad pehini eo. Glaz-du ? Marteze. Glaz-moug kentoh ?

Marteze. N'eus forz pehini eo, ar pezh a zo sur eo ez eo kaer-kenañ ar menezioù-ze da weled evel-se, hanter-guzet en noz, o dent begeg o tistaga bremañ ken net war an oabl.

EUR VUHEZ ALL, EN NOZ

Dirazom hag en tu dehou, ar mor braz a lugern c'hoaz eun tamm, evel ma 'nije dalhet eul lodenn euz sklerijenn an deiz. N'eus ket warnañ an disterra krizenn, rag n'eus ket ken eur mouch-avel. An êr a zo distanet. C'hwez ar mor ha c'hwez-vad fleur ar jardin mesket a gomañs da zevel, peadra a-walh da blijoud memez d'ar re ha n'eo ket tano o fri.

Gand an deñvajilenn e teu war an douar eur vuhez all disheñvel ouz hini an deiz. Homañ, ne weler ket anezi; ne reer nemed he hleved. E kreiz kêr, an otojou a chom abred a-zav. An dud a en em denn ken abred en o ziez evid an noz. Hag e vefed tentet neuze da gredi e tlefe beza kousket toud an traou, pegwir eo marvet trouz an deiz. Med hemañ a deu meur a drouz all da gemered e blas, re hag a ne veze ket ano anezo a-raog, trouz skiltr a bep seurt, a vez klevet a-bell, evel kan ar gleskered hag hini an tousigi laouenaet gand freskadurez an noz, re al laboused-noz a dehe ar sklerijenn en o zoullou kuz hag a zo tennet outo bremañ gand an naon; re villierou a amprevaned bihan, killeien-raden ha grilled, hag a ne gredent ket en em ziskouez e-pad an deiz. Toud an drouz-se a zav, kalz krefvoh eged an hini a glever dre amañ e Breiz-Izel d'ar memez eur, en eur zonadenn dispar.

Neuze, dirag ar mor, e sal vraz an otel, e hellom saouri ar banne on-eus kemeret. Hemañ a vez greet outañ « un planteur ».

Eur banne mad. Me a gred zoken eo an hini gwella am-eus evet biskoaz. N'eo ket diêz da aoza; henn ober a heller zoken dre amañ : kemerit eun aval-orahjez (pe zaou), eun hanter hini sitroñs, eun hanter ananaz, eur werenn vraz hag eul loa. Gwaskit ar frouez gwella ma hellit evid lakaad o dourenn da goueza er werenn, lakit goude eur werennad vad a rom, euz an hini gwella, ha diou pe deir loaïad sukr, hervez ho c'hoant. Meskit mad toud gand al loa. Ar banne a zo prest. N'ho-peus netra ken da ober nemed henn saouri ha pa zavoh diwar ho kador, derhel gwella ma helloh war ho killorou, rag ho taoulagad hag ho tivesker a zo gouest d'ho traisa en desped deoh.

Pa'z eom kuit euz an otel, ez eo dija teñval an noz, beza ma'z eo uhel al loar war an oabl.

« Med, emezon, pa welan homañ, daoust ha touellet out ? » Hag e frotan va daoulagad evid beza sur n'on ket. Hag arabad deoh mond da vousc'hoarzin en eur zoñjal em-eus evet re a rom em gwerennad « planteur » ! O ! Nann.

Petra a zo en em gavet 'ta neuze ? Eun dra hag a n'em-eus ket gwelet biskoaz : al loar a zo o para. En he henta karter emañ; striz eo c'hoaz he hroasant. « Med, a lavaroh din, petra, en eun dra ken ordinal, a zo gouest da skei evel-se spered eun den rezonabl ? Al loar he-dez ar memez furm er bed oll ! »

Ya, sur. Med c'hwi, ma vjeh amañ ganen, a vije ken souezet ha me. E Breiz, ar hroasant d'ar henta karter a vez atao en tu deou d'al loar, e gerniel gantañ war-zu an tu kleiz. Er Martinik, penaoz emañ ? Kouezet eo da drañ al loar, evel ma vije deuet dezañ skuiza gand tommder an deiz, troet e zaou gorn gantañ war-zu an neh. Tra a-walh, ne gav ket deoh ? da lakaad eun den da chom sebezet, pa wel anezañ evid ar wech kenta !

*
* *

En devez war-lerh, ez eom gand Alain, Marie-Paulé hag o bugale, da ober eun dro-bourmen dre an enezenn, war-zu an hanternoz. C'hoant on-eus mond beteg ar « Mont-Pelé », ar menez-tan anavezet dre ar bed oll abaoe ma 'n-eus distrujet kêr Saint Pierre.

Penn-da-benn an hent, ne gavom nemed menezioù. Ar re genta, war bemp pe c'hwez leo, n'int ket gwall-uhel. N'o-deus nemed tri pe bevar hant metr. Med ken sonn int, ha ken lemm ar rehier war o beg, ma vije lavaret ez int kalz uheloh.

Mond a rankom goustadig gand an oto. An hent, troidelleg, atao sao-diskenn, trohet koulz lavared penn-da-benn ar roh, a zav amañ uhel war gostez ar menez, a ziskenn, eun tamm pelloh, koulz lavared a-blomm, e trao-niennou don ken striz ha ma leuskont just plas da zour-red eur froud vihan, gwenn gand an eonenn, da goueza a-benn kas euz an eil men war egile.

Eno, en daou du, ne weler nemed koajou gouez, ken stank ar gwez ha ken founnuz ar plant all dindanno ma ne ya den ebed biskoaz enno.

Ar gwez hag ar bambou a zo ken teo ha ten uhel ha ken

teo all ar plant troelleg endro dezo hag ar re on-oa gwelet dija tost da Fort-de-France. Ar raden a zo brasoh c'hoaz ha ken glaz ha ma vezont da viz even, e Breiz.

Goude, eur wech treuzet ganeom ar menezioù, eh en em gavom e diou gêrig, tost an eil d'eben, an hini genta anvet « an dorgenn vraz ». Al leh ma 'mañ warnañ an diou gêrig n'eo ket heñvel ouz an hini emañ o paouez treuzi. Amañ emañ war dorgennou hag a zo c'hoaz uhel a-walh, pegwir o-deus da nebeuta pevar pe bemp kant metr, med o lein, e-leh beza begeg ha meineg evel hini ar menezioù tro-war-dro, a zo ront, hag a zo douar mad warnañ, gand kondon a-leiz, hag a heller labourad heb poan.

E-kichen an diou gêr-ze, emañ eun tamm evel ma vijem e-kreiz eun enezenn : tro-war-dro n'eus nemed menezioù begeg, kalz uheloh, gand rehier lemm war o hern ha koajou don war o hostezioù. Amañ, er hontrol, ne welom nemed douar-labour karget a drevadou druz, a blant bananez, a blant ananaz, a wez-orañjez. Eur hornad douar pinvidig ! Beb an amzer e teu deom tremen dirag eur park-leton bennag hag a zo pemzeg pe ugent bioh o peuri ennañ. Med an dra-mañ a zo rouez a-walh. Kredi a ran e kav d'an dud dre amañ a vez re a labour gand al loened-korn. Ma karfent e hellfent gounid mad ganto koulskoude, pegwir an enezenn a rank lakaad digas he hig euz ar Frañs pe euz an Amerik. Med n'eus den amañ têt d'al labour.

E-HARZ TROAD AR MONT-PELE

Ar horn-bro-mañ, e-kreiz ar menezioù, n'eo ket braz, med glaz eo ha brao-kenañ, ken glaz ha ken brao ma ra tud ar vro outi « la petite Suisse », ar Suis vihan.

Hag e ranker lavared ez eo heñvel a-walh ouz ar Suis, dreist-oll pa weler anezañ a-bell. Ken glaz eo, sur, hag homañ. Menezioù a zo endro dezi evel en homañ. A-ziouti e vez zoken aliez kement a goumoul izel hag a-zioh ar Suis, nemed e ranker lavared e sav an traou amañ drusoh, abalamour ma 'z eus, gand kement a zour, kalz muioh a dommder.

Evid treuzi anezañ, an abadenn n'eo ket hir, med evid e guitaad ez eo red deom sevel adarre war-zu lein ar menezioù. Hag e savom tamm-ha-tamm, goustadig, korn-tro goude korn-tro. Pa 'z om eet uhel a-walh, ne hellom ket kenderhel heb chom eur pennad a-zav evid rei eun taol-lagad

all war ar gwel dispar a zo eno dirazom, en traññ.

Kalz kaeroh eo c'hoaz ar vro pa vez gwelet euz an neh.

Ar bellded, ar houmoul gwenn a ra eur gurunenn war ar menezioù, an heol splann a zo ken kaer war an traou gand e vannou alaouret a rofe deom da gredi, êz a-walh, emañ dirag eur bed all, eur bed krouet gand faltazi hag ijin eur sorser oll-halloudeg.

Henn anzav a rankan, ne guitaom ket eur gwel ken kaer heb eur tamm melkoni en on halon. Med red eo deom mond pelloh. Sevel ha diskenn a reom adarre meur a wech dre goajou, druz ha founnuz ar gwez enno, a-raog en em gavoud e-harz troad ar « Mont-Pelé ».

Dre ma tostaom outañ, Alain a lavar deom : « C'hoari or-bo o weled anezañ o tiskouez deom e gern begeg ha lemm. Peurvuia e kuz anezañ er houmoul evel ma 'n-ije mez gantañ. »

Med rankoud a reom beza gwelet mad gantañ, Simone, Loik ha me, rag kerent ma 'h en em gavom el leh ma heller a-wechou gweled e veg e welom anezañ sonn en èr heb an disterra koumoulenn endro dezañ. « Biskoaz, eme Alain, n'em-eus gwelet anezañ ken net ! » N'eo ket uhel kenañ. Med e gostezioù, loued a-dachadou, ruz a-dachadou all, a zo sonn hag e veg lemm.

Kousket mad e tlee beza bremañ. Ne zav ket an disterra mogedenn diwarnañ. Koulskoude emañ c'hoaz, pemzeg kant metr izelloh, dindan ar mein-teuz dislonket gantañ, restadou kêr St-Pierre, distrujet gantañ d'an eiz a viz mae 1902, ha relegou ar c'hweh mil den warn-ugent a oa o chom e-barz. « Aliez a-walh, a lavar deom Marie-Paule, e teu dezañ dihuna en e gousk ha diskouez eun tamm e gounnar en eur lakaad douar an enezenn da gren. Ne vez ket eur zizun heb eun tamm kren-douar. »

Tost da gern ar menez e weler c'hoaz, dizolo, heb eur blantenn, ar mein-teuz dislonket gantañ trizeg vloaz ha tri-ugent zo.

Mond a reom eur pennad mad gand an hent a-hed ar menez heb gelloud distaga on daoulagad diouz e gern. Santoud a reom zoken eun tamm anken en on halon o soñjal en dud a oa eno o veva eüruz hag e-noa-eh skoët warno ken buan ha ken kaled. Pegement a zroug e-noa greet ha pegement ez eo gouest c'hoaz da ober, ne ouzer ket peur !

A-greiz-toud e tibouchom dirag ar mor. Mond a ra du-hont pell da goll en dremmwel, rag amañ, el leh ma 'maom, neh an dorgenn, a zo c'hoaz uhel a-walh, war-dro pemp kant metr. Dirag ar mor « Caraïbe » emaoñ adarre. Da weled ez eo kalz trañkilloh eged moriou Breiz. N'eus ket zoken eur grizenn warnañ hirio.

En tu kleiz, bannou gwenn skeduz an heol a gouez a-blomm warnañ hag henn laka da lugerni evel eur melezhour divent.

En tu deou, ez eo ken trañkil an dour, med n'e-neus ket ar memez liou : en tu-ze eo glaz, glaz-teñval, koulz lavared glaz-du; eun tamm eo heñvel ouz ar « Méditerranée ».

Chom a reom eur pennad mad a-zav e neh an dorgenn, ken brao eo ar gwel, a-raog diskenn beteg ar mor. Eur blijadur dispar on-eus o leuskel on daoulagad da bara war doud an traou, war ar mor en traoñ, en daou du, war gern ar menez-tan, war ar rehier uhel ha sonn a zo e traoñ an dorgenn e bord ar mor, war an trêzennou gwenn-kann ha war ar gwez-kokoz a zo eno o trempa o zreid en dour.

EUR PAOUR-KÊZ ÊR TRIST WAR AN DUD

Pa en em lakaom da ziskenn, ne welom koulz lavared plantenn ebed ken. War an douarou n'eus nemed geot treud, seh ha kaled, hag eur bodad sperr-du bennag amañ hag a-hont. Koulskoude an douar a zo da weled ken druz hag en tu all d'ar menez. Ne vank dezañ da rei traou mad nemed eur banne dour bennag.

Med allaz ! Ar houmoul ne fell ket dezo dond beteg amañ. Evid lavared gwir, ne hellont ket dond dreist ar menez hag an douar a chom treud atao evel ma vije bet milliget gand Doue beteg fin ar bed.

E traoñ an dorgenn, Alain a laka ahanom da dreuzi kêr Saint-Pierre. Ar gêr-mañ a oa (henn lavaret on-eus dija) eur gêr vraz a-walh, pegwir e oa e-barz c'hweh mil den warn-ugent, muioh eged na oa e Kemper ugent vloaz zo.

Bremañ eo eun druez he-gweled; n'eo ket ken nemed eur hoz tamm kêrig louz, gand tiez bihan, paour ha digempenn. Toud an dud enni o-deus eur paour-kêz êr trist, evel ar beorien hag ar re n'o-deus ket ken netra da hedat er bed-mañ. Ar bevrvasa anezo a zo dilabour. Chom a reont war ar ru, war gaeou ar porz, war dreuzou o zi, da zofjal en o mizer, o daouarn ganto en o godellou, o hedat eur burzud

hag a zigaso dezo arhant heb re a labour.

E kêr St-Pierre, e troom a-zeou evid mond c'hoaz eur pennad war-zu an hanternoz, a-hed ar mor. Eno ez eo striz an hent etre ar roh hag an trêz, ouspenn, n'eus warnañ nemed mein gwenn evel ma veze e Breiz-Izel hanter-kant vloaz zo hag an oto a laka eur boultrenn spontuz da zevel en êr.

En desped d'an dra-ze e talv ar boan ober an dro. Etre an hent hag ar mor ez eus, penn-da-benn, eur renkennad kokoz kaer hag a ya, kredabl, e-leiz anezo o gwriziou da eva eur banne bennag en dour zall.

En tu all d'an hent, e weler beb an amzer, a-zioh ar rehier, parkeier leton, med ar geot a zo ken seh ha ken kaled enno ma n'eus bieh ebed gouest da beuri anezo. Amañ hag a-hont ez eus ive warno eur mell mên-teuz ruz, bet dislonket gand ar menez-tan.

Mond a reom beteg eun tamm bourk anvet « Le Prêcheur ». Biskoaz n'em-eus gwelet bourk ken paour ! O chom ennañ ez eus marteze tregont pe zaou-ugent pesketer. N'eus ket ennañ eun ti a-zaore. Lavared a reer Breiz-Izel n'eo ket pinvidig. Med ar re a lavar an dra-ze n'o-deus ket biskoaz kuitaad on bro. Amañ pep hini e-neus e di hag eun ti mad. Red eo gweled ar pez a zo eno. An ti n'eo nemed eun tamm lochenn vihan, eul lochenn goad; n'eo ket brasoh eged an hini a vez greet dre amañ evid lakaad an oto e goudor, goloet gand folennou tîl merglet. Al lochenn-ze a vev enni ar pesketer, e wreg, ha seiz pe eiz a vugale, gand eiz warn-ugent pe dregont degre a dommder ! Eun druez eo gweled an dra-ze, med petra da ober evid gwellaad o stad en eur vro heb labour ?

Plijadur e-leiz on-eus bet oh ober an dro-ze en enezenn. Med pa en em gavom er gêr, ez om skuiz oll, braz ha bihan.

Da veza kendalhet.
YVES MIOSSEC.

DIAOULED ER MENEZ

Er-mêz eo deuet eil disk Diaouled ar Menez eun toullad miziou 'zo dija. An Diaouled-mañ a heller lavared ez int brudet ha n'eo ket aliez koulskoude eo e vez skrivet pennadoù diwar o 'fenn. Tra-walh eo bet dezo mond d'ar festou-noz...

Bez' ez eo Diaouled ar Menez unan deuz ar strollad — unan deuz ar « groupchou » evel a vez laret gand an dud — ar gwella anavezet dre ar vro, ha bet eo bet unan deuz ar re genta savet. War-lerh, zo bet savet kalz re all eveltañ, med n'o-deus ket padet oll keit hag eñ, nemed marteze ar Zonerien Du, hag o-deus bet greet int eun hanter muioh a ziskou, peogwir int en em gavet d'ober ar pevare e-kerz an hañv diweza.

Penaos o-deus greet Diaouled ar Menez da badoud ? C'hweh vloaz 'zo 'ni eo ganet ar strollad, e miz c'hwevrer 1972, hag er penn kenta, eo Yann Gwasdoue, diwar ar peñ e-neus kontet deom e-unan, eo a zo bet an hini ma oa diazezet ar strollad warnañ. Evel-henn 'ni eo en em gavet.

WAR ROUDOU STIVELL

E penn kenta ar bloavez 1972, e oa Alan Stivell o paouez ober eun dro-Vreiz evid ar wech kenta, goude beza bet tapet brud e Pariz, hag e oa bet pobladoù a dud hag a re yaouank dreist-oll o selaou anezañ. Bet e oa bet ive lisenad deuz Karaz g' selaou Stivell, ha ken entanet hag an oll e oant bet o kleved anezañ. Troet e oant da vuzika dija, med n'anavezent ket kalz tra neuze deuz muzik ar vro, nemed eun ton bennag bet selaouet ganto diwar ziskou, hag e krogas ar c'hoant enno da vale war roudou Alan Stivell.

Eun devez e teuas ar re yaouank-mañ da weled Yann Gwasdoue, hag a oa anavezet dija e-giz talabarder, nemed e oa eñ ive neuze o klask eur stumm da renevez muzik ar vro. Ar stumm nevez-ze e-neus kavet buan a-walh asamblez gand e gamaraded nevez, ha setu ar skipailh kerkerent d'eur fest-noz

da Lanruven. Iskiz e oa bet kavet war an taol gand meur a hini deuz an dañserien, med buan e oa bet digemeret mad, ha nebeud-tre a amzer goude, e oa bet enrollet eun disk bian kenta.

Diwar neuze e oa lañset Diaouled ar Menez. Youenn Gwernig eo e-noa kavet an ano-mañ da vadezi anezo. Euz a beb tu e vezent goulennet da vond d'ar festou-noz, hag a oa neuze oh ober eul lamm-kresk ive, ha n'eo ket er Menez nemedken, med beteg e bro-Leon hag e bro-Vrest. Amañ koulskoude, e-neus soñj mad Yann Gwasdoue e oa tristoh ar festou-noz, ne veze ket kement a blijadur, nemed tamm ha tamm ha nebeud ha nebeud, e oa deuet an traou da vond war wellaad.

A-DRUGAREZ D'AN AKORDEON

Hag eur momed zo bet, e veze goulennet an Diaouled da vond d'an oll festou-noz. Med d'ar poent-se, ne oant netra, ma ne veze ket Yann Gwasdoue da heul ar strollad : eur wech, emezañ, e oa bet tapet krog ennañ, ha roget dezañ e jiletenn, pa ne oa ket bet an devez araog en eur fest-noz bennag, da heul e gamaraded all. Penaos displega neuze o-dije bet greet Diaouled ar Menez kement a verz er bloaveziou 1972-73 ?

A dra zur, ez eus meur a rêzon da ze. Da genta, e oa eun doare nevez ganto, peogwir e reent gand binviji nevez neuze, binviji a-vremañ, evel ar gitar, ar violon, ar vandolinnenn, ha kement-mañ ne oa ket bet gwelet fall, dreist toud gand ar yaouankiz, diboultrenna doareou ar vro eo a oa ze d'an ampoent. Daoust da ze, e talhent da stumm ar vro. Derhel a reent d'ar biniou koz koulz ha d'ar vombard, derhel d'an ton ive, kana a reent ouspenn d'ar poent-se, nemed e lakent muzik war ar homzou.

M'o-deus greet kement a verz avad, eo marteze a-drugarez d'an akordeon : eur stumm nerzuz ha birvidig o-doa tapet gand ar benveg-mañ, dreist-oll pa oa sklêr o-doa ar vuzisianed plijadur o veza asamblez, santet mad e vez kement-mañ bepred war an disk bian kenta, ha plijadur o-deveze neuze an dud o tafisal en o hompagnunez.

Bez' e oa Diaouled ar Menez d'ar poent-se eur skwer deuz eur serten dihun o tond, evel a oa ive ahendall Stivell, Servat, an tri Yann, ha kavet e oa bet o-doa bet eur menoz mad o lakad da vond asamblez er memez strollad, ar gitar hag a veze klevet gand ar vuzianed rock, hag an akordeon, hag a veze klevet bepred er baliou. Dañsal giz ar vro ouz son an akordeon ne veze ket greet ken nemeur, nemed e kostez

Brazparz, hag eun nevezinti e oa bet kement-mañ hag a oa bet plijet.

DIAOULED FURROH...

Bremañ n'eo ket peurheñvel Diaouled ar Menez deuz ar pezh e oant er bloaveziou kenta, med n'o-deus ket chenchet eur bern-ze kennebeud. Diwar an eil disk o-deus greet, e heller lavared o-deus gwelloc'h labouret, ha muioh, evid ober anezañ. N'eus ket marteze kement a vuhez hag a startijenn e-barz an toniou, evel a oa war an disk braz kenta. Deuet eo moarvad Diaouled ar Menez da furraad en eur gosaad, hag abalamour da ze eo ne glaskont ket ken son toniou ha ne vijent ket deuz o bro, da lavared eo deuz bro ar Menez.

Komprenabl eo, dre m'emaint oll o chom - hag o labourad - e tro Karaez. En eun ostaleri ema unan o servija, egile a zo o labourad en eur garaj, an trede a zo o teski bugale, unan all a zo marhadour leoriou, n'eus nemed Melaine Favennec hag a vije kaner a vicher. Ahendall, ez int chomet oll ive amatourien.

Surroh e seblant bremañ Diaouled ar Menez koulskoude deuz ar pezh a reont, med gwir eo n'eont ket ken aliez da redeg ar festou-noz kennebeud, diou wech ar miz d'ar muia toud. Muioh a ze a amzer o-devez da zohjal, da labourad, da glask o hent. Deuet int evelse da zon asamblez e gwirionez, ha n'eo ket mond an eil da heul egile.

Amzer o-deus kemeret ive da glask an toniou koz, ha war o disk diweza, e lavaront sklêr peñh ha gand piou int bet o teski an toniou a c'hoariont. Beza gwirizennet don er menez, en o bro, setu aze petra fell bremañ da Diaouled ar Menez, muioh-mui, med n'eo ket evid se e rafent fae war doniou nevez savet, gand ma vo stumm ar vro warno, evel an hini a zo bet savet gand Job Philippe.

Koulskoude, Diaouled ar Menez ne vez ket eeun an hent dirazo dalhmad kennebeud. N'ouzont ket ha poan-benn o-deus paket abalamour d'ar brezoneg, med war dachenn ar yez o-deus eur gudenn ha ne deuont ket a-benn da ziluzia. Lod, barz ar strollad, n'ouzont tamm brezoneg ebed. Ar re all n'ouzont ket tra-walh. Setu perag moarvad, daoust ma fell dezo bruda ar brezoneg, ne vez ket klevet Diaouled ar Menez o kana ken (evel a ra bepred meur a strollad all hag a zeblant o-devez poan ar ganerien enno o kompren bepred ar pezh a vezont o kana) zoken ma 'z eo skrivet peb tra bewech war golo an diskou e brezoneg penn-da-benn, hag e brezoneg nemedken.

DIRAB ETRE AR HOMITEOU

Ahendall, pa ne fell ket dezo mond da n'eus forz peseurt fest-noz, e tibabont etre ar homiteou a vez o houlenñ anezo. N'on ket sur tamm ebed e rajent mad oh ober ze, med n'eont ket d'ar festou-noz a vez savet gand ar re a zo bet o vrezelia en Aljeri, nah a reont er memez mod mond d'ar re a vez savet gand kostezennou politikel a zo (ar gomunisted da skwer), n'eus nemed an UDB hag a-wechou ar PSU hag a vije diouz o grad. Kement-se, eme Yann Gwasdoue, a zo dre ma fell dezo beza Bretoned araog peb tra, hag int broadelou-rien. Nemed int prest da vond da zon evid netra da zikour grevisted pa vezont goulenñet.

Eun dra bennag all a zo c'hoaz, rag ar strolladou a vez an dahserien a-eneb dezo bremañ e meur a leh, ne blijont ken d'an oll, m'o-deus bet greet. Ar ganerien zoken a-wechou a zohj ganto ne ra ket atao ar strolladou eul labour vad, n'eo ket gwir muzik euz ar vro eo a vefe klevet ganto. War ar poent-se, Yann Gwasdoue eo sklêr e respont : eur strollad evel Diaouled ar Menez a blij d'an dud, emezañ, anez da ze ne vije ket kement a glask warnañ. Ha bremañ, n'heller ket sevel eur fest-noz ma ne beder ket ive muzisianed a hiz nevez da lakad an dud da zañsal, a beb eil gand kanerien ha sonerien daou-ha-daou. Setu perag o-deus bet Diaouled ar menez kemend-all a ziskibien : Kanfarded ar Hoad, Kanfarded Rostren, hag all...

Evel sonerien da zañsal eo anavezet Diaouled ar Menez dreist-oll. Koulskoude, war an daou zisk braz o-deus greet, ez eus ive toniou-bale, gwerziou ha toniou a-boz. En em houlenñ a heller avad perag ne vez ket klevet toniou a-boz aliesoh, er festou-noz lakom. Yann Gwasdoue a zohj gantañ n'eo ken troet ze an dud gand toniou seurt-se, ha ma n'eo ket ken brudet an Triskell e-mesk an dud, emezañ, eo abalamour d'an toniou a-boz a vez klevet ganto evid ar muia. Ahendall, ne hell an toniou-mañ beza roet da gleved, koulz lavared, nemed en eur hoñsert, sed e vije red ha red mad neuze labourad en eur feson all, aketusoh ha donnoh sur a-walh.

Neuze, daoust ha n'ema ket an Diaouled o vond da skuiza ha da skuiza o selaouerien oh ober atao ar memez labour ? E gwirionez, mond war-raog o-deus bet greet abaoe ar penn kenta, hag eun tamm mad a hent o-deus bet greet abaoe an disk bian kenta. Pelloh e karjent mond c'hoaz avad. En em ziazeza gwelloc'h-gwella en o bro, ya, med beza prest da zigemer tud all dindan o banniel, en o zi, muzisianed all, ha kanerien, ha sonerien daou-ha-daou. Hag en em gleved ganto neuze, evid êsê kinnig an traou en eun doare all, er bloaveziou da zond.

Talvezoud a ray heuilla ar strivadennou-ze a-dost, rag n'eo tamm ebed heñvel o dibab ouz hini kanerien pe strolladou all, hag a vije kentoh, lod anezo da vihana, o klask en em lakad war wel...

J.S.

FICHENN DIWAR-BENN « DIAOULED AR MENEZ » :

- Diwar an disk bian kenta, e heller lavared piou a oa er strollad er penn kenta : Yann Goasdoue, Yann ar Manac'h, Yann-Erwann ar C'horr, Padrig Sicard ha Fulub ar Balp.
Lod anezo a zo bepred e-barz, med deuet zo tud all d'o heul, peogwir war an disk diweza, e kaver anoiou : Fulub ar Balp, Yann-Erwan ar C'horr, Melaine Favennec, Tangi an Dore, Yann Gwasdoue, Bruno ar Manac'h.

- Roll an diskou ha pladennoù bet greet gand an Diaouled :

- « En dro - Ton doubl », Noroit KEL 17123.
- « Diaouled ar Menez », Ar Folk SB 318.
- « Atao ez eom », Ar Folk SB 364.

Euz an eil disk, ez eus bet gwerzet ouspenn 30.000 skwerenn.

- Ema Diaouled ar Menez o paouez distrei deuz an Alamagn, leh m'int bet digemeret euz ar gwella gand saliadoù 2000 a dud, e peb leh. War a zeblant, ema an Alamanted o tizoloi gwelloc'h-gwella muzik ar Vretoned, goude beza bet greet anaoudegez gand hini ar Skosed hag an Iwerzoniz.

KLASKIT C'HOAZ KOUUMANANTERIEÑ ALL DA VRUD NEVEZ.

**HA PERAG NE GINNIGFEH KET
EUR HOUMANANT DA VRUD NEVEZ
DA UNAN BENNAG
DA GENVER AN NEDELEG ?**

En niverenn-mañ, e vo kavet da lenn :

- eur marvaill diwar-bluenn Per-Jakez Helias :
unan hag a hellit derhel anezañ er wrez en ho
penn, hag e viro da vond e-barz ouz an oll
loened-krign bian n'o-deus netra d'ober aze nemed
marteze unan diouto : an hini a labour ahanoh
dalhmad d'ho lakaad da gerzoud pelloh eged e leh
m'emaoh...

- « Sant-Alar » : an ênvorennou-skol he-deus
gonezet ganto Huguette Gaudart, a Redene, eil
priz Per Trepos 1977.

**- eur pennad-skrid diwar-benn Diaouled ar
Menez :** unan deuz ar brudeta strolladou muzi-
sianed a hiz nevez a zo er vro...

Au sommaire de ce numéro :

**- un conte de Per-Jakez Helias, que vous pourrez
vous garder au chaud dans la tête, et qui empê-
cheront toutes les petites bêtes qui pourraient vous
la ronger d'y entrer, sauf une peut-être, celle qui
vous pousse toujours à marcher plus loin...**

**- les souvenirs d'école buissonnière d'Huguette
Gaudart, dans un récit qui lui valut d'obtenir le
second prix P. Trepos 1977.**

**- une étude sur l'un des groupes les plus populaires
des festou-noz : Diaouled ar Menez.**